

2023 : DERNIERS TRAVAUX DE VOIRIE !

Après la pause des fêtes de fin d'année, la réalisation du futur Pôle d'Echanges Multimodal (PEM) a repris le 3 janvier.

Le réaménagement de l'avenue de la gare a redémarré en vue d'un achèvement début février. Cette dernière phase de travaux se concentre principalement sur les trottoirs, sans impact sur la circulation définitivement remise à double sens entre gare et centre-ville. En revanche, celle-ci sera interrompue ponctuellement quelques demi-journées pour implanter les îlots directionnels et couler le revêtement de la chaussée.

Le réaménagement du carrefour de l'avenue de la Libération et de la rue de Concarneau a lui aussi repris. La circulation des véhicules est maintenue à sens unique, en direction du centre-ville. Mi-février, ce chantier s'étendra à l'intégralité des rues de Concarneau et Dom-Michel-Le-Nobletz. Au programme, une nouvelle piste cyclable, ainsi que la réfection de la chaussée, des trottoirs et du stationnement. Jusqu'à la fin des travaux cet été, les rues concernées seront fermées à la circulation, sauf accès piétons (voir plan ci-dessous).

De l'autre côté des voies ferrées, le réaménagement de l'impasse de l'Odet débutera le 16 janvier. Pendant les 10 mois du chantier, la voie demeurera en permanence accessible aux piétons. Les véhicules pourront circuler

avant 9h et après 17h. Le parking de la salle omnisport demeurera accessible dans cette même tranche horaire.

Par ailleurs, avenue de La Libération, le chantier de la nouvelle gare routière a lui aussi redémarré avec des travaux de dépollution et de nivellement de sol. Les fondations de l'avent, qui abritera les voyageurs, seront réalisées à partir du printemps. Enfin, la construction de la passerelle enjambant les voies ferrées se poursuit en vue d'un achèvement mi-2023.



Le chantier de réaménagement de l'avenue de la gare



PLUS D'INFOS SUR LA PAGE FACEBOOK GARE PARC ET SUR LE SITE QUIMPER-BRETAGNE-OCCIDENTALE.BZH !
POUR TOUTE QUESTION : GAREPARC@QUIMPER.BZH

GARE PARC INFOS CHANTIER - TITOUROU CHANTER GAR LIORZH

NIV. 9 - GENVER-MEURZH 2023

2023 : AL LABOURIOÙ DIWEZHAÑ WAR AN HENTOÙ !

D'an 3 a viz Genver e oa krog en-dro al labourioù da sevel ar Pol Eskemmoù Liesvodel (PEL), goude ehan gouelioù fin ar bloaz.

Adkrog eo al labourioù da adkempenn bali ar gar gant ar pal bezañ echuet ganto e penn-kentañ miz C'hwevrer. War ar riblennoù-straed, dreist-holl, e vo labourer e-pad ar prantad diwezhañ-se eus ar chanter. Ne vo ket cheñchet an tremenerezh etre ar gar ha kreiz-kêr : daoudu e chomo an hent evit mat. Daoust da se e c'hallo bezañ berzet gwech ha gwech e-pad un nebeud penndevzhioù, evit staliañ enezennigoù-heñchañ ha diskenn gwiskad an hent.

Adlañset eo ivez al labourioù da adkempenn bali an Dieubidigezh ha straed Konk-Kerne. Untu e chom tremenerezh ar c'hirri, war-zu kreiz-kêr. E-kreiz miz C'hwevrer e vo astennet ar chanter-se da straedoù Konk-Kerne ha Dom Mikael an Noblez en o fezh. Programmet zo digeriñ ur roudenn divrodegoù nevez hag adober an hent, ar riblennoù-straed hag ar plasoù parkañ. Serret e vo an div straed-se d'an tremenerezh : an dud war droad hepken a c'hallo mont di betek fin al labourioù en hañv-mañ (sellout ouzh an tres amañ-dindan).


En tu all d'an hentoù-houarn e vo adkempennet hent-dall an Oded adalek ar 16 a viz Genver. Dek miz e pado al labourioù eno. E-keit-se e chomo digor bepred d'an dud war

droad. Etre 5e d'abardaez ha 9e vintin e c'hallo ar c'hirri tremen pe mont da parklec'h sal an holl sportoù.

Ouzhpenn-se, adkrog eo chanter ar porzh-hent da zont, e bali an Dieubidigezh, gant labourioù disaotrañ ha kompezañ. Adalek an nevezamzer e vo savet diazezoù ar baled a roio gwasked d'ar veajourien. Erfin, war ober emañ c'hoazh an dreuzell a-us an hentoù-houarn : e-kreiz 2023 e tlefe bezañ echuet al labourioù.



Ar chanter da adkempenn bali ar gar



EVIT GOUZOUT HIROC'H : PAJENN FACEBOOK AR GAR LIORZH HAG AL LEC'HIENN QUIMPER-BRETAGNE-OCCIDENTALE.BZH !
EVIT FORZH PESEURT GOULENN : GAREPARC@QUIMPER.BZH